

GWERZ EMGANN SANT-KAST⁽¹⁾

"Breiz"
15 oct 33

Barz e Miz gwengolo, an devez unekvet,
Ar Saozon e Sant-Kast a zo bet diskennet ;
Malboroug (2) a sonje, gant e soudarded ru,
E kemerje Breiz evel c'hoari dotu.

Nag an duk d'Aiguillon, pa glevas ar c'helio,
A oa e kichen Brest, 'barz e Sant-Vazeo ;
Da bevar c'horn ar vro souden en deus kaset
Kabitened fidel da voda e soudarded.

Pan erruas ar vrud er gér a Landreger,
Ar c'hont D'Aubigny a reas son ar c'bleier ;
Savet e voe raktal er c'harter tro-war-dro
Eur strollad tud vaillant prest da zifenn o bro.

Pan erruas ar vrud e gér a Lanuon,
E voe lakaet souden kloc'h ar vali da son ;
Savet e voe raktal er c'harter tro-war-dro
Eur strollad tud vaillant prest da zifenn o bro.

Pan erruas ar vrud e treuziou Gwengampiz,
Evid son ar c'hloc'h bras e redchont d'an iliz ;
Savet e voe raktal er c'harter tro-war-dro
Eur strollad tud vaillant prest da zifenn o bro.

O tremen Sant-Brieg, o deus em renkontret
Ar c'habitened arme hag an troupou renket ;
« Allo, sonit ar march gant ho taboulinio ;
« Awalc'h-jomp breman evit difenn hor bro ».

P'errujont e Plankoed, e weljont ar Saozon
Kampet war an draezenn, e kichen ar mor don,
Hag ar C'hont D'Aubigny a ziskennas neuze
Betek ar Saozon hag a c'houennas digante :

- Piou oc'h, hag a be bro ha petra a glasket,
Vel eur vanden laeron, potramant tud kollet ?
Ma 'z oc'h deut er vro-man da c'houlen aluzon,
E kavan, war ma le, hir ho prosession.
- Breman souden, kontik, ni a ray d'eoc'h gwelet
Ha ni zo laeron, ha ni 'zo tud kollet ;
An aluzen a c'houennomp eo Brest ha Montroulez,
Sant-Malo, Sant-Brieg, d'ober hon tiegez.

- Ma kavit eun tammik aragon ma c'homzou,
Me 'm eus ugant mil den (3) da souten anezo.
- Na ma pefe ugant all, m'hen tou, war ma feiz,
Ne po ket tachen eus douar Breiz ;
Met ar pez a vuzulfet aman souden,
Gant ho korfou maro, astennet penn-ouz-penn.
- Allo, taboulinou, sonit-hu d'imp raktal,
Ma rimp d'ar Saozon komans ar bal ;
Gwaskomp ar forbaned a zo deut eus Bro-Saoz
Da glask hor supren evel bleizi en noz.

Ne oa ket ar c'hont e c'her peurachuet,
Ma komansas ar c'herz gant an troupou renket,
Ar gwad kristen skuilha hag ar maro redek ;
Ma komansas bolejo strakal war ar gerrek,

Kriz vije ar galon na sklasje gant ar spont,
O welout ar re varo o koueza 'n dro d'ar c'hont ;
E gleze en e zourn en koummoul ar gombat,
E kerze joaïüs 'vel o vont d'an ebat.

— Allo, gwazed Treger, diskouezit ez oc'h paotred !
Biskoaz en hon eskopti n'ez eus bet poltroned !
En araok, paotred vat, hag ho pezo, war va le,
Danvez justinou ruž da roi d'ho kwrage !

En araok ! D'ar Saozon, enebourien Breiz,
Enebourien d'hor roue, enebourien d'hor feiz.

E kreiz eur goummoullenn, e voe gwelet neuze
Sant Erwan binniget, gant eur vandenn aele,
Tistroi ar boledou a gostez e vroiz.

169

17 ✓

Ne oa ket ar c'hont e c'her peurachuet,
 Ma komansas ar c'herz gant an troupou renket,
 Ar gwad kristen skuilha hag ar maro redek ;
 Ma komansas bolejo strakal war ar gerrek,

Kriz vije ar galon na sklasje gant ar spont,
 O welout ar re varo o koueza 'n dro d'ar c'hont ;
 E gleze en e zourn en koummoul ar gombat,
 E kerze joaüs 'vel o vont d'an ebat.

— Allo, gwazed Treger, diskouezit ez oc'h paotred !
 Biskoaz en hon eskopti n'ez eus bet poltroned !
 En araok, paotred vat, hag ho pezo, war va le,
 Danvez justinou ruz da roi d'ho kwrage !

En araok ! D'ar Saozon, enebourien Breiz,
 Enebourien d'hor roue, enebourien d'hor feiz.

E kreiz eur goummoullenn, e voe gwelet neuze
 Sant Erwan binniget, gant eur vandenn aele,
 Tistroi ar boledou a gostez e vroiz,
 D'o skei adarre gant enebourien Breiz.

Neuze e savas kri-forz e koste ar Saozon :
 « Truez ! karter ! emezo, truez, karter ha pardon ! »
 Re ziwezat e oant ; gant o chupennou ru,
 E voent lazet neuze evel bleizi en hu.

Echu eo an emgann ; dizroet omp d'hor c'hériou ;
 Sant Erwan binniget, reseo hor pedennou !
 Te ac'h eus hon difennet, roet d'imp ar viktoar
 Ha bepred e kanimp kantikou d'az gloar.

Diwar dournskridou Penguern n° 94, p. 29. Reizskrivet gant

AR MENNEK.

(1) - 11-9-1758.

(2) - Bligh eo a rene ar soudarded saoz.

(3) - 8.000 ne oant ken ; wardro 3.000 a voe lazet pe veuzet.

An Ao. Maurice a oa neuze person e Sant-Kast a skrivas kement-man diwarbenn an emgann : « Je me figurais que tous nos pauvres bataillons allaient être écrasés ; mais non ; la Providence ne permit pas que les coups (des Anglais) portassent ».